

## PROGRAMM AR RUMMAD “EUS AR BREZHONEG D'AR C'HROUIÑ”

### Pal ar staj :

Kemer fiziañs o skrivañ e brezhoneg : reiñ digor d'ar spered krouiñ, ha, war un dro, gellout kemer harp war ur yezh vev ha kaout plijadur oc'h ober.

### E-kerzh ar staj :

Kinniget e vo d'ar stajidi mont pelloc'h gant ar yezh dre sevel traoù e brezhoneg pe e vefe sevel barzhonegoù, pe danevelloù, pe kanaouennoù, pe gerioù-kroaz, pe sketchoù, pe pennadoù evit ar c'hazetennoù, pe marvailhoù, pe fabledennoù ...

Pedet e vo skrivagnerien a-vremañ ha tud hag a oar krouiñ traoù e brezhoneg (kanerien, konterien, ...) da gemer perzh er staj evit kas prantadoù un devezh labour pe zaou diouzh o c'hoant gant stajidi ar rummad “Krouiñ e brezhoneg”.

Ober d'an dud dont da vezañ oberiant e brezhoneg en ur labourat kenetrezo peotramant ober anaoudegezh gant krouerien a-vremañ hag ar re-se disheñvel-mat an eil diouzh ar re all ha kaout plijadur oc'h anavezout gwelloc'h ar pezh a vez savet ingal e brezhoneg gant tud a beb seurt, a zo palioù all evit ar rummad-se.

### Daou zen a zeuio da gas ar rummad-se er bloaz-mañ :

- **Patrig Drean**, hag a gaso ur prantad war ar sevel rubrikennoù kazetenn, istoerioù berr, sonennoù/barzhonegoù ; pleustret e vo war ar stil hag efedusted al lavar, ha kemeret e vo harp war mammennoù ar brezhoneg bev kement evel war ar pezh a zo tost da galon pep unan ag ar strollad. (2 zeiz).

- **Yvon Gourmelon** (Yann Gerven, eus e anv pluenn), a bleustro war an troioù hag ar spered stag ouzh ur yezh vev oc'h ober d'ar stajidi sevel sketchoù bihan : lakaat lusk ar brezhoneg en ur frazenn, deskiñ urzh ar gerioù disheñvel diouzh hini ar galleg, sevel divizoù bev diouzh patrom ur brezhoneg komzet hag a c'heller diskleriañ fraezh a vouez uhel... (3 deiz).

### Evit kemer perzh er staj-se :

Dav e vo d'ar stajidi bezañ en o aes e brezhoneg, met n'eus ket ezhomm kaout barregezhioù eus an uhelañ. Ur staj brezhoneg eo, kenkoulz hag un digarez da gemer fiziañs pa skriver e brezhoneg, tra ken : degas startijenn ha c'hoant da labourat a-stroll a vo eus ar pep pouezusañ.

Diouzh ar fazioù stankañ pe ar skoilhoù a-fed yezh a vo lakaet war wel beb ma vo labourer asambles e vo savet war ar prim prantadoù stummañ berr evit kompren penaos kaout an disober anezho.

Mat e vo d'ar stajidi degas o urzhiataer ganto ma c'hellont, pe un dra bennak da skrivañ (kaier, folennoù, kreionoù du, kreionoù liv, gomennoù, stilioù, stabilo, blanco), geriadur ha yezhadur, un alc'hwez USB evit gellout mirout o labour.

Ar stajidi o-deus bet tro da skrivañ ur pennad bennak e brezhoneg c'hoazh n'o do ken degas anezho : amzer ha tud a volontez vat a vo kavet e-kerzh ar staj evit reiñ alioù dezho ha sikour gwellaat an traoù.

---

**EVEZHIADENN** : Pleustret e vo war an danvez-se bemdez eus 9 eur betek kreisteiz hag eus 2 eur betek 5 eur goude kreisteiz, a-hed ar sizhun.

Ar stajidi o devo dibabet mont gant ur rummad diouzh temoù e-giz hemañ ne c'hellint ket kemer perzh er c'hentelioù brezhoneg kinniget diouzh live an dud.